

// SANT DISPAR HOR PATRON /

- skan: Sant Dispar hor patron  
Ni ho ped a galon  
Mirit en an' Doue  
Or c'horv hag on ene.
- 1- Kaer eo d'houz ar mintin  
Ar gliz er parkeier  
Kaer ho pennoz divin  
Warnom et pep amzer.
- 2- Ar pinvidig, ar paour  
Ama' zo daoulinet  
Elec'h danvez hag aour  
Dezo roit eürusted
- 3- Roit ive" vel gwechall  
Yerc'hed d'ar glanvourien  
Deuit ato d'on diwall  
Ouz ar vrec'h, ar vosenn.
- 4- Sellit er mor diroll  
Or c'herent en danger  
Emaint o vond d'algol  
Truez ! O Tad tener
- 5- Bleizi'zo bet gwelet  
tro war dro d'ho lochenn:  
Bleizi'zo kounnaret  
Ouzom, ouz or c'hredenn.
- 6- An anaveled gouez  
Pell diouzoc'h a ded'he  
Hag ar bed didruez  
Trec'h've d'ho pugale ?
- 7- Nann, nann rag ho kalon  
Morse neo bet skaset  
Nann dalloud or patron  
Morse ne vo berreet
- 8- C'hoant on-eus da veva  
E skeud ho tiouaskell  
Chom heb ho servicha  
Kentoc'h mil gwech mervel
- 9- Oll epad or bue  
Ni ho pedo ~~laouenn~~ laouenn  
Da c'hedal mond d'an nenv  
D'ho meuli da viken

*Chante  
à Dineault  
le 11 sept 1988*

*ce cantique  
représenté le  
canticum à  
St Roman*

